

FEIZ HA BREIZ

==== Kannad Miziek ar Vretoned ====



X DE LANGLAIS

MIZ MEZEVEN 1935

Feiz ha Breiz

Kelaouenn vizek gant skeudennou
Renet gant an Aotrou PERROT

Koumananchou diouz ar bloaz :	Embannon d'ouz ar bloaz :
Breiz 13 lur	1/4 pajenn 150 lur
Frans ha broioù stag outi. 15 lur	1/2 pajenn 275 lur
Evid ar e zo re diavez bro 20 lur	3/4 pajenn 300 lur
	1 pajenn 500 lur

Pa gemerer da nebeuta pemp Feiz ha Breiz diouz ar bloaz, pep
niverenn a deu da 10 lur hepken

Taolit evez :

Evit ma vezo esoc'h euna pep tra, da **Serignac hepken**
eo e tleer kas, hiviziken, kement tra a zeil ouz *Feiz ha Breiz* :
skr. du. embannou, koumananchou ha paeamanchoù.

Kemennadurez d'hor c'houmananterien.—War
golo an daouzekvet *Feiz ha Breiz* a en em gavo gant hor c'houma-
nanterien, o fedimp, da baea, o unan, o c'houmanant raktal, da :
M. le Directeur de FEIZ HA BREIZ, Serignac (Finistère),
C. C. 21 802 Rennes, ha neuze n'o devez nemed 15 gwenneq vizou
evit degas o arc'hant, e lec'h eur skoed, ma rankimp karga ar
post da vont d'her goulenn betek an ti.

Pempzek deiz goude ar gemennadurez-ze, ma ne vez deuet netra
d'eomp, e kasimp eur baperenn all d'hol lennerien d'o fedi da baea
kenta ma c'hellint. Ne gargimp ket ken ar post da vont da c'houlenn
arc'hant ar c'houmananchou betek an ti, rak re vizus eo evit hol
lennerien.

TAOLENN AR MIZ

Kalon sakr Hor Zalver Jezuz-Krist	231
Nerz kalon tud yaouank Breiz	238
Kouer yaouank, dalc'h an emgleo en da vicher	240
Al lidou sakr	242
Na livirit ket	245
Ar Roue hag ar Falc'hon	248
Kenavo	252
Aliou Yann Landevenneg d'ar Prins Lanig	254
XXV ^e Gouel ar Bleun-Brug	256
Leor kanaouennou	259
Kenstrivadegou ar Bleun-Brug - Divinadennou	260 - 261
Kuzulioù ar Geginerez, ar Medisin	261 - 263
Keleier ar Miz	264
Eun darvoud war ar flourenn	265
Per ar C'holin	266
Leorioù nevez	267

FEIZ HA BREIZ

Kalon Zakr

hor Zalver Jezuz-Krist

AR peza a ra d'an den beza dispar etouez an holl groua-
durienn a daol troad war an douar-man, eo e benn
hag e galon; er penn, ema ar sklerijenn; er galon, an
dommder; er penn, ema ar spered; er galon ar garantez;
mar d'eo kaer ar penn, atao troet warzu an nenv, kae-
roc'h eo c'hoaz ar galon; ar galon, dreist-holl eo a ra an
den; hi eo an tenera eus an holl izili a zo ennomp, ar
c'henta o veva, an diveza o vervel, an tosta d'an ene; an
daoulagad a verk meur a dra eus ar peza a dremen en hon
ene, met ne verkont ket koulz ha ne verkont ket kement
ha ma ra ar galon.

Pa grouas Doue penn an den ec'h hadas warnan ar ge-
ned hag ouz he gwelet o vleunia her c'havas kaer; pa
grouas e galon ec'h hadas enni ar vadelez hag ouz he
gwelet o vleunia her c'havas kaer; siouaz, ar pec'hed a
deuas; an drouk-spered a strafuilhas labour-Doue; tenva-
lijenn a zavas e spered an den ha fallagriez en e galon
a deuas da veza direiz; hanter-amzer ne oar keq mui pe-
naoz karet evit karet ervat; en em goll a c'hell kenkoulz
o karet re evel o karet re nebeud; nag a bed o deus bet
lemmen kasais war hent ar vuhez dre ma ne ouient ket
lakât o c'halon war o dourn, ha pa veza red, o dourn war
o c'halon ?

Abalamour da-ze eo ez eo deuet kalon an den da veza
ken hedro; kasât a ra hizio ar peza a gare dec'h ha war-

c'hoaz e karo ar pezh a gasâ hizio; abalamour da-ze eo ez eo deuet kalon an den da veza ker c'hoantus :

*P'en deus bet gwenn e c'houlenn ruz,
Pa vez sec'hor e c'houlenn glao,
Eun dra bennak a vank atao !*

O welet pegement a zroug a oa deuet er bed-man dre zizentidigez an tad kenta Adam, Jezuz-Krist, an eil Adam, a deuas war an douar da lakât urz e kement lec'h ma oa deuet ennan dismantr ha dreist-holl e kalon an den; evit dont a-benn eus e daol ne glaskas nemed eun dra : beza mad hag izel a galon, « mitis et humilis corde », ha lakât ar re all da ober evel dan : « discite a me ».

I. KALON VAT H. Z. JEZUZ-KRIST

Pa zigoromp an Aviel, n'eus forz e pelec'h, e kouezomp, ne welomp hano dre ma 'z eomp, nemed eus karantez Jezuz-Krist evid e Dad hag evid an dud; e galon a oa evel eun delenn a zone ma oa eun drugar he c'hlevet hag a gase betek tron an Dreinded holl veuleudiou ar bed-man; evel ma ne raent nemed unan e Dad hag Hen, e youl eo ne rafe an dud hag Hen nemed unan ken nebeud, dre ar garantez a vije etrezo. Hag evit lakât an dud d'e garet o c'haras e-unan da genta ha gand e galon e c'hounez ar bed.

« Deuit-holl davedoun-me, c'houi holl hag a zo poaniet, emezan, ha me o tiboanio », hag, e gwirionez, den, bis-koaz den, n'en deus bet digemer fall digantan.

Digoret en deus e zivrec'h benniget da vriata an holl, — peogwir ez eas betek briata Judas, — ar re vihan, ar re baour, ar re glanv, a gorf hag a ene; ar re holl a veze a re e lec'h all a c'helle diskuiza war boull e galon.

Bugaligou a c'hoantae mont betek ennan; trouz ar raent; klask a raet miret outo da dostaat : « Lezit-i da zont, emezan, rouantelez an nenv a zo d'ezo ha d'ar re a zo henvel outo ! » hag e vousc'hoarze ouz ar vugaligou vihan hag e poke d'ezo.

Tud yaouank a deue davetan hag o veza sellet outo o c'hare.

Tud nevez a vanke gwin d'ezo e kreiz lein o eured, hag evit lemmel ar vez diwarno e rae e vuzud kenta, o trei an dour e gwin.

Eur bobl tud a rede war e lere'h, d'e zelaou o prezeg, en eul lec'h distro ne gaved ennan netra da zebri; naon o devoa, Jezuz a gemeras truez outo : « Misereor super turbam » hag e lakeas pemp bara ha daou besk da groski, en eun hevelep doare, ma c'hellas maga ganto pemp mil den.

Tud klanv a veze digaset dirazan hag o faree; tud lor a deue d'e gaout hag e roe d'ezo ar yec'hed; gwelet a eure kerent o ouela war o re varo hag e lakea ar c'horfou da zevel eus ar bez, leun a vuhez.

Digemer laouen a rae da Vari-Madalen, ar bec'herez vras, anavezet dre bevar c'horn kêr; da vaouez ar Samari, a gavas e tal puns Jakob koulz ha d'ar vaouez kêz all, a oa bet tapet oc'h ober an droug, epad gouel an Teltou, gand unan ha n'oa ket he fried, hag edod o vont da laza a daoliou mein; daerou Per a bike e galon ha selaou a eure pedenn al laer dehou.

Hen oa, Tad ar Mab foran; hen oa ar Pastor mat a red, betek en em skuiza, warlerc'h an danvad dianket, her galv dre e hano hag eur wech m'en deus e gavet, hen doug war e ziouskoaz hag hen digas en dro.

Ne c'hourc'hemenn d'e ziskibien netra dreist o galloud : « Va yeo, emezan, a zo ês da zougen ha va bec'h a zo skanv da zamma ».

Ne c'hourc'hemenn d'e ziskibien netra dreist o galloud : en em c'houzanvoc'h, ma en em glevoc'h, ma vezoc'h tud a beoc'h : « beati pacifici ! »

Eun dervez e ziskibien a c'hoantae gwelet tan an nenv o koueza war eur gêr eus ar Samari, ha ne cant ket bet digemeret enni : « A! emezan, c'houi ne ouezit ket pe-seurt spered o ren breman; mab an den a zo deuet da c'hounit an dud ha nann d'o c'holl ! »

En em garet; kaout ludu da c'holo an tan; lakât eleiz a draou dindan an treid; en em bardoni.

— « Pet gwech e tleomp pardoni hon nesa? a c'houlenne Per ouz e Vestr; seiz gwech? »

— « N'eo ket seiz gwech eo a lavaran d'it, eme Jezuz, met dek ha tri ugent gwech seiz gwech », da lavaret eo, pardoni atao, ken alies ha bemdez hag aliesoc'h ouz red ha pardoni an holl, zoken ar gwsa enebourien evel ma reas Hen diwar e groaz.

Goure'hemenn a rae d'e veleien beza evel an ein etouez ar bleizi; arabad d'ezo en em glemm re, daoust pegement a dro a c'hellfent kaout d'hen ober; arabad d'ezo peur-zistaga diouz ar c'hef ar gorzenn hanter dorret, na peurvouga ar vouchedenn a zao eur stlabez moged bennak diouti c'hoaz.

Karet a rae an holl, e enebourien hag e ziskibien; evelato etouez an eneoù a veve, en e zerr, e oa unanik bennak hag a gare dreist ar re all; Yann, an diskib a ziskuzas e benn war boull e galon, d'ar goan ziveza, Lazar hag e ziou c'hoar, Martha ha Mari, a oa eus ar re-ze.

Lazar a oa o chom e Bethani; d'e gêr eo ez ae Jezuz, p'en deveze ezomm da ziskuiza eur pennad; pa glanvas e voe kaset dillo kemennadurez d'ezan, met ne c'hellas ket dizrei ken trumm ha ma c'houlennet; pa zigouezas edo e vignon Lazar er bez, pevar dervez a oa; o welet glac'har c'hoarezed an hini maro, e ouelas hag ar Yuzevien a oa eno a lavare : « Gwelit pegement her c'hare ! »

Jezuz ne dlee ket gouela epad e basion; ne ouelas ket pa deuas Judas d'e werza, na pa deuas Per d'e nac'h, na pa deuas e genvroiz d'e gondaoni ha Pons-Pilat d'e gas d'ar maro; neuze edo eur prins an denvalijenn; ezomm en devoa da ziskouez e nerz-kalon hag hen ober a eure en eun doare sebesus, met dirak bez Lazar, p'edo c'hoaz o veva etouez an dud e vuhez den, evel pep hini ac'hanomp, her gwelomp o kemeret perz e glac'har ar re a gare; kement-se a ziskouez e oa e Jezuz eur galon henvel ouz

kalon an dud all, eur galon dener, eur galon vat hag a gare an nesa, nann hepken gant karantez eun Doue, met zoken gant karantez eun den hag ar brasa testeni a roas eus e garantez hag an diveza a voe sevel sakramant meulet ra vezo an Aoter ha mervel war ar groaz evit digeri d'an dud dor ar baradoz prennet gand ar wezenn he devoa kollet Adam.

II. KALON IZEL H. Z. JEZUZ-KRIST

Na pebez kalon vat en devoa Hor Zalver Jezuz-Krist hag ivez na pebez kalon izel; n'oa ket evit gouzanv al lorc'hentez.

Betek seiz gwech diec'htu, en hevelep dervez her c'hlevomp, gant-komzou hag a strak evel ar gurun hag a zev evel an tan, o skei war brabanserien lorc'hus e amzer : « Malloz d'eoc'h c'houi, Doktored ha Pharisianed, eme-« zan, tud chouchet zo 'c'hanoc'h, teodou milliget, beziou « gwennet, tud fallakr, ha war zigarez ma n'ho peus ket « a c'hoant da vont d'ar baradoz, a garfe lakât ar re all « da ober evel doc'h ! »

E parabolenn ar Pharizian hag ar Publikan e tiskouez d'eomp kaera portred a zo bet tennet biskoaz eus an den lorc'hus. A! al lorc'hentez na pebez tech; na pebez tech dies da c'houzanv, kaset gant Doue ha gand an dud; na pebez tech dies da guzat ha ken dies all, da nebeuta, da barea; an dud lorc'hus a zo ker gouridik, ma ne ouezer ket penaos komz outo gand an aoun a vez d'o glaza.

Jezuz-Krist a oa izel a galon; n'oa na rok en e gomzou, na faeus en e zellou, na lorc'hus en e vale, na dizoare en e wiskamant; ne denne ket a lorc'h eus e c'hened ha koulskoude e oa kaera den a zo bet gwelet biskoaz war an douar-man : « speciosus formâ proe filiis hominum »; ne glaske ket diskar ar re all, na bresa brud vat e nesa war zigarez en em zével e-unan, uheloc'h egetan, evel ma 'z eus kalz ouz hen ober, en hon amzer-ni, marteze, muioch eged e amzer all ebet biskoaz.

Hen hag a ziskenne eus an nenv, Hen hag a oa Mab ar baradoz, a guze e c'hloar; tec'het a rae diouz e gen-voiz a glaske e iakat da roue; daoust ma ouie pep tra war draou ar bed-man ha war draou ar bed-all, ne glas-ks ket diskouez e zeskadurez.

N'oa ket evit gouzanv al lorc'hentez hag abalamour da-ze e falvezas gantan dont er bed-man, en eur c'hraou, e varvas war eur groaz hag ec'h en em guz breman din-dan doareou ar bara hag ar gwinn e sakramant an Aoter, meulet ra vezo.

Pebz kentel evidomp ha piou a lavaro biken, mat a-walc'h, pegement a eurusted eo gouest an den da gaout, zoken war an douar-man, ma karfe hen heulia penn-da-benn.

Pegement a eurusted a vefe en tiegeziou, er parrezioù, er broioù, ma vefe heuliet dre holl, kenteliou Hor Zal-ver Jezuz-Krist, mat hag izel a galon.



Arabad kredi e vefemp holl hevel a-walc'h evid ar pez a zell ouz ar galon, o tont war an douar-man; muioc'h a spered a zo roet d'an eil eget d'egile; gwelloc'h kalon en deus an eil eged egile; sperejou a zo ha ne vezer ket evit sanko netra enno, met n'eus ket eur galon ha ne vefe ket gallet digas eur wellaenn bennak enni gand an amzer.

Na fur eo eta ar mammou hag a voaz ez-vihanik o bu-gale da veza dilorc'h en o c'homzou, en o hale, en o gwiskamant ha mat e kenver ar beorien, mignonned Hor Zalver, ar re goz ha kabac'h, enor an tiegeziou, ken ês da laouenât ha ken ês da c'hlaza; mat zoken e kenver al loened, servicherien mut an Aotrou Doue.

Na fur eo ar gristenien a ya bemdez da skol kalon Jezuz evit deski an doare da ren ervat o buhez.

Er skol-ze e tesker karet Doue dreist pep tra hag an nesa eveldomp hon-unan, abalamour da Zoue; eno e tes-

ker rei hag en em rei, hep gedal netra 'n holl, en dizro.

Eno e tesker e pe du trei ar galon evit ma vo en he ês : « Fecisti nos ad te ». Evidoc'h, o va Doue eo ho peus hor c'hrouet hag hor c'halon n'en em gav ket war he zu keit ha ma n'en em gav ket war hoc'h hini.

Eno eo e c'heller rei he gwalc'h d'hor c'halon ker c'hoantus; eno eo e kaver gwad Hor Zalver Jezuz-Krist, eur gwad fresk ha yac'hus, a gas eus hon izilf tersienn ar gwall dechou hag a zil enno eur vuhez nevez ha laouen; eno, en eur ger, eo e kav an den, war an douar-man, an tanva eus an dudi m'ema enni ar Zent hag an Elez er baradoz.

O Jezuz mat hag izel a galon grit d'hor c'halon beza hevel ouz hoc'h hini.

Y.-V. PERROT.



Nerz-kalon tud yaouank Breiz !

EUR Breizad bet oc'h ober e amzer zoudard en eur gêr-
vras eus Frans, a skriv evelhen : « Va lezit da la-
varet eur ger diwarbenn ar zoudarded breizat am eus ana-
vezet gwelloc'h dre ma veven bemdez ganto. Eur mignon a
lavare d'in n'eus ket pell : « Da genvroiz er c'hazarn a zo
eur vez o gwelet hag o c'hlevet ! » Ha gwir eo siouaz ! evit
an darn vrasa. Heuliomp hon tud yaouank, paotred fur
hor parreziou, ha gwelomp penaos e teuont d'en em goll.
Goulennit diganto, araok ma kuitaont ar gear, petra zon-
jont eus an amzer servich : « Eur bloaz ehan, emezo, eur
bloaz a blijadur ! En em gaout a reont e Paris pe en
eur gear all, laouen bras da welet, o kana eur ganouenn
bennak, divalo, mez he c'hlevet. Kalz banneou a zo bet evet
epad ar veach, hag ec'h, en em gaver er c'hazarn, eun
tammig abafet. Ar re all a zell outo, met ar Vretoned, pa
vez tremenet meur a vanne dindan o fri, a zo dispont. Tri
dervez goude, o c'havit nec'het maro, krog klenned ar
gear en eur c'halz anezo... An ehan, ar blijadur ! netra !
klask a reont distripa eun nebeut geriou galleg saout,
gant aon na vije grêt goap outo, ma vijent klevet o komz
brezoneg. N'ouzont e pelec'h mont, hag e chomont asten-
net war o gweleou da zelaou pep seurt traou sot, rak ne
glever nemet traou sot en eur gambr soudarded... Pa zi-
gor ar « C'hantine », ar Vretoned a en em gav gant ar re
genta. Eno ec'h en em vodont holl endro d'eun daol, hag
ar chistr, ar gwin a ruilh keit ha ma vez arc'hant er c'ho-
dell. Ar c'horn er c'hinou, e varvailher, hag e brezoneg,

hag ec'h ever adarre eur banne all evit kas kuit ar son-
jou tenval. Bemdez meur a hini a zistro d'ar gambr mezo-
dall.

Awechou, evel va amezeg-gwele, eur c'hanfart eus ar
Morbihan n'am eus morse gwelet diabaf, e tigasont ganto
eur voutailhad, gant aon da gaout sec'hed epad an noz.

E kichen ar c'hazarn, eur c'helc'h-studi a zo digor evito,
met ret e vije lakat dilhad all, ha gwelloc'h eo ganto chom
da eva er c'hantine eget mont da glask c'hoariou onest
d'ar c'helc'h-studi. Da zul zoken, ne guitaont ket ar
c'hazarn. N'eo ket dies konta ar Vretoned a vez en ofe-
renn. Mez o deus eus o feiz ; hag alies e klaskont an tu
da lavaret droug eus ar veleien hag ar relijion, evit dis-
kouez int paotred ! a c'hiz nevez ».

Ar bloaz a dremeno evelse. Ar c'hazarn a zo skol an
holl dechou fall. Hor c'henvroiz a gailharo muioc'h-mui
o c'halon. Meur a hini a en em blijo er vuhez lezirek-se
hag a jomo er zervich evit gounit eun tamm « pansion ».
Ar re all a zistroio da Vreiz-Izel, o ene saotret gant lous-
toni ar c'hazarn, o c'horf marteze ive. Trist ! Trist.

Arabat lavaret e vije an holl Vretoned eus an danvez
fall-ze. Gwelet em eus Bretoned ha n'o doa ket aon rak
o skeud, a veze en oferenñ bep sul, a lavare zoken o fe-
dennou war o daoulin e tal o gwele, a ziskoueze o feiz,
sounn o fenn, hag a stanke o beg d'ar re a glaske ober
goap outo. Met ar re-ze peurlies a oa bet o tarempredi
kelc'h-studi o farrez hag o doa desket eno beza dispont
dirak an dud fall ha diskiant.

Tud yaouank a dle mont da zoudarded pe da vartolo-
ded, bezit henvel ouz an eil rumm, ha nann ouz ar rumm
kenta. Kement hini a gerz eun dre an hent mat, a vez
istimet gant an holl, gant e vistri ha gant e gamaraded,
hag ar pez a zo gwelloc'h, e goustians a lavar d'ezan e
ra e zever.

Kouer yaouank, dal'h an emgleo en da vicher

DIGERNEZ eo bet miz Mae evidomp er bloa-man.
« Biskoaz, eme ar re goz n'hon devoa gvelet eur miz Mae ken gouez, ken yen, ken avelok. » E gwirionez an holl o deus paket kalz pe nebeut diwar o fri. Bras dreist-holl eo bet ar reuz en deus graet e kreiz hor maeziou nevezet gand an nevez amzer : ar gwez rouez, an avalou douar kalbennet; an deliou ken tener, devef ha diskaret, a vec'h mo' devoa gelllet en em zispaka dindan bannou an heol; ar bleuniou ken lirin flastret ha di-ze'e'hed pa oant o tigeri, araok beza gelllet taoler endro d'ezo an distera c'houez vat.

O vont dre an henchou, en derveziou-man, hag o weler a bep tu d'in an dismantr graet gand ar gwall amzer, e sonjen ive gant tristidigez en droug graet en hor Breiz-Izel gand ar votadeg, en deus lakaet e ken alies a barreziou tud an hevelep micher d'en em zével an eil eneb egile. Ne fell ket d'in, sklaer eo, kaout abeg en dud kalonek o deus poagnet da stanka an hent ouz ar bolitikerien digoustians a golle brud vat o farreziou, nann, rak n'eus nemet meuleudi da rei d'ezo. Met e kichen ar parreziou ma stourme enno daou spered, diou vanniell dis-henvel a-grenn, nag a barreziou ha n'oa o lakaat disparti etre ar c'hoztezennou nemet droulans, gwarizi etre familhou, droulans ha gwarizi c'houezet re alies gand eun trabaser bennak.


Kouer yaouank, lavar d'in, pa z'a ken fall gant traou hor micher, daoust ha bez 'edo ar mare d'en em zisunanf,

d'en em zinerza ? Piou en devezo gounezet ar muia, er yenien-ze aet er c'halonou ma n'eo ket enebourien hor micher ?

Da vihana mard'out bet kozteziet en eun tu pe du, skub pell diouzit buan an imor fall. Tremenet eo ar barr ha mall eo distrei adarre war ar bengenn da gregi el labour. Al labour-ze az peus da ober eo skigna endro d'it an emgleo, ar peoc'h, ar garantez etre ar re yaouank eus da oad.

E peseurt micher all ez eus kemend a izomm da vale dourn-ha-dourq eget en hon hini ? Ar pez a goll ac'hanomp, e gwirionez, eo ne ouezomp ket en em glevet, en em skora, ne gomprenomp ket awale'h nerz an emgleo. Ni hag a zo labourerien douar kristen ne vevomp ket eus hor feiz a zesk d'comp atao en em garet, en em harpa an eil war egile evit dougen aesoc'h a ze hor samun. Bet ez eus en hor micher eur spered fall hag a zo ret trei kein d'ezan, ar spered-se hag a ra d'an den en em drei warnan e-unan ha beza prest da gaout abeg e kement graet gand ar re all, ar spered-se hag en em lez da veza gounezet ken buan gant komzou touellus pe gwasoc'h en em lez da veza heuzet gand banneou milliget.

Kouer yaouank, d'it te eo da daoler ar spered fall-ze d'an traon, da lakaat en e blas eur spered nevez. Hen ober a ri ma ouezez en em zilezel, ma klaskez atao en em ankouanae'haat da unan evid ober vad ha plijadur d'ar re all, ma renez eur vuhez kristen penn da benn. Ha c'hoant az peus da gaeraat, da laouenaat, da wellaat hor maeziou a Vreiz-Izel, bez etouez da amezelen ha da gamaladed eun hader a emgleo, a beoc'h hag a garantez, ro harp da gemend a labour da unani da genvroiz.



JUBE FOLGOAT

AL LIDOU SAKR

ARREBEURI AN ILIZ

HON tud koz, a-holl viskoaz, a zo bet troet ouz an traou kaer; karet a raent kaout arrebeuri gaer, en o ziez, grêt, nann diwar zao, met kizellet e koat dero, kalet ha padus; karet a raent, dreist-holl, kaout arrebeuri gaer en o ilizou.

Ne gavent netra re ger, na netra re vat, pa veze hano gantoù da gaeraat ti an Aotrou Doue.

Doue eo al laouedigez; Hen eo an Hini a laouena pep den er bed-man; ar re a dosta outan a zo laouen; eur zant trist a zo trist e zantelez; Doue a zo laouen hag e diez eo tiez al levenez.

Ar pezh a had tristedigez eo an denvalijenn; lakit eun den, e-unan, e kreiz an noz, kollet e gouelet eur c'hoad, hep gouzout pe du trei; ne vezo ket evit miret ouz an dristidigez da waska e galon; ar pezh a had tristedigez eo ivez ar c'hlenved; klenvejou a zo hag a c'hlaez ha re all

hag a laz; holl bihan ha bras e tenvaleont tal an den; ar pezh a had tristedigez eo c'hoaz an naon; ar bara a grenfa ar galon hag ar gwinn hel laouena; eun den goulo e gof alies a-walc'h a vez tenval e benn.

Ar pezh a zo gwir evid ar c'horf a zo ker gwir all evid an ene; an denvalijenn, ar c'hlenved hag an naon hel laka ivez en dristidigez; met evel m'en deus laketa an Aotrou Doue, war an douar-man, peadra da laouenaat ar c'horf, en deus laketa ivez da darza en ilizou, teir eienenn hag a bella tenvalijenn, klenved ha naon an ene : ar genta a darz eus ar gador-brezeg; an eil eus ar gador-govez hag an trede eus an daol-bask.

I. AR GADOR-BREZEG, EIENENN AR SKLERIJENN

Ar gador-brezeg eo ar gador e pigner enni evit kelenn ar gristenien; e penn-kenta an iliz ne oa ken kador-brezeg nemet hini an Eskob; hen oa embanner bras komzou Doue ha diwar e gador, savet a-dreñv an aoter vras eo e roe d'ar gristenien e gelennadurez hag e c'hourc'hennou.

Gand an amzer e voe savet, e peb iliz, eur gador all hanvet JUBE, m'oarvat, dre ma oa ar ger-se kenta hini a lavare an avieler, pa bigne er gador-se, en eur c'hourc'henn e vennoz digand an oferenner a-raok staga da gana an Aviel : « Jube, domne, benedicere ».

Kaera jube a zo e Breiz-Izel, eo hini iliz Folgoat, grêt breman ez eus pemp kant vloaz; jube ar Folgoat a zo e mein kersanton; jubeou all a zo c'hoaz e koat, e Lambader, e parrez Plouvorn, e Berven, e parrez Gwitevede, e Sant-Fiakr, e parrez ar Faouet, e Sant-Nikolas, e parrez Priziac hag er Roc'h, e kichenik Landerne.

Ar jubeou-se, daoust peger kaer e oant, a oa kasaus, dre ma virent ouz an dud a oa en iliz da welet mat an aoter vras, ha setu perak e teuas, tamm ha tamm ar c'hiz da ober kadoriou-prezeg a gased eus an eil lec'h d'egile d'an iliz hag eus ar c'hadoriou-prezeg a staged, a-varo, e kreiz an iliz, el lec'h a gaved gwella, evit ma c'hellje an holl klevet mat ar prezeger.

Kaera kador-brezeg a oufed gwelet eo hini Sant-Thegonnec, e bro-Leon; n'eo ket da lavaret he defe he farez, e nep lec'h, dre ar bed kristen.

II. AR GADOR-GOVEZ, EIENENN AR YEC'HED

Ar gador-govez a zo eur pezh arrebeuri rannet e tri gombod; er c'hombod kreiz ez eus eun azezenn d'ar beleg hag en daou gombod all eur skaon, d'ar re a ya da govez da c'hellout daoulina warni, en dra ma vezont oc'h anzañ o fec'hejou.

Ar c'hadoriou-kovez n'eo deuet ar c'hiz anezo, en hon ilizou nemed abaoe ar XVIth kantved; ar gristenien, gwechall, p'o deveze c'hoant da vont da govez a zaoulina, e kichen ar beleg a veze azezet, en eur c'horn pe gorn eus an iliz, war eur skaon vaen.

E iliz Louanec, el lec'h m'eo bet sant Erwan person, ez eus kadoriou kovez, eus ar re gaera a oufed gwelet.

III. AN DAOL-BASK, EIENENN AR VAGADUREZ

An aoter, — taol vras ar gristenien, — daoust pegen hir e c'hell beza, a vezo alies re verr, evit ma c'hello ar gristenien a zo en oferenn, kaout lec'h da dostaat outi ha setu perak ez eus bet grêt d'ez eun astenn, a hanvomp an daol-bask, e lec'h ma taoulinomp da zebri bara an Elez, aozet diouz doare bugale an dud.

An daol-bask, e eleiz a ilizou, he deus stumm eur speurrenn kentoc'h eget stumm eun daol ha kement-se n'eo ket mat; n'eo ket ret, mar kirit, rei d'ez ledander an aoter vras, met rei d'ez ledander daou viz hepken, a zo ivez rei re nebeud, en holl.

Kaera taol-bask a anavezan, e Breiz-Izel, eo hini Bignan, e Bro-Wened, bet grêt, en amzer ma oa an Aotrou Buleon, Doue r'hen pardon, e penn ar barrez-se.

Eun troatad ledander he deus, da nebenta, hag, en doare-ze, pa zon kloc'h ar gommunion, e vez ês leda an doubier warni hag e kreder e vezer o tostaat ouz eun daol henvel ouz eun daol.

Y.-V. P.

NA LIVIRIT RET :

« An dud a relijion n'int ket gwelloc'h eget a re all »

O komz evelse, e roit goulskoude, hep sonjal, meuleudi d'ar relijion. Rak doare ho peus da gredi e tlefe ar relijion rentañ an dud gwelloc'h. Ar pezh a ra poan d'eoec'h, war ho meno, eo o veza ne welit ket a wellaenn o tont en dud a relijion, ne ziskouezont ket en o buhez muioc'h a zantelez, a garantez eget ar re all, ar re ne vezont wardro iliz ebet, wardro beleg ebet.

Arabat eo barn an holl war unan hepken pe war eun nebeut tud hepken. Eur wech eur Zaoz, diskennet e kear Boullogn, e Frans, a welas eur pesketaer hag en devoa eur rilhenn e pep skouarn, ha kerkent e skrivas war e gayer : « E Frans ar wazed a zoug rilhennou en o diskouarn ». Ar Zaoz a fazie; gwelet en devoa unan gant rilhennou hag e skrive : « An holl ».

Evelse e fazi kalz tud. Gwelet o deus eun aotrou, eun itroun o tarempredi an ilizou ha da c'houde oc'h en em ziskouez rust e kenver o nesa, oc'h en em rei d'ar pec'hed, d'an dizurziou, hag e lavaront : « Ar gristenien n'int ket gwelloc'h eget ar re all ». Ra lavarint evelhen, hag e chomint war dachenn ar wirionez : « Meur a gristen a ra mez d'an Iliz, a zo dizentus ouz lezenn an Aviel ».

N'e ket awalc'h anaout ar wirionez evit hen heulia. An den a jom libr. Klevet en deus prezeg eneb ar vesventi, an hudurnez, ar gasoni, met diskouez a dle bolonte vat, rak ma ne laka ket e boan, ar c'henteliou deuet dre eur skouarn a yelo er maez dre eur skouarn all.

Ar relijion a zesk d'an den beza onest, leal, karantezus, pur a galon, hag ar re a zo sentus ouz he c'henteliou a zav uhel meurbet er zantelez. Vad a ra d'an den klevet

displega lezenn Doue, klevet prezeg diwarbenn karantez Jezus-Krist evidomp. Ha stank int ar re a fell d'ezo plijout da Zoue; ober poan d'ezan, en em rei d'ar pec'hed, morse n'her graint.

Bez ez eus kristenien hag a glask beza henvel muioc'h mui bemdez ouz Jezus-Krist, o Meŋstr, a c'houzant gant joa evitan pep seurt poaniou; a wel Jezus-Krist er paour, er c'hlanvour, en emzivad, hag a ra kement a c'hellont evit o zikour; a zalc'h glan o c'halon evit ma chomo Doue ganto, ne reont morse pec'hed marvel ebet, a zo o ene kaer evel ar baradoz.

Piou a lavaro pegement a dud a zo bet distroet diouz an droug goude beza grêt eur govesion, eur gomunion vat, goude beza klevet eur brezegenn, beza lennet eur bajenn eus an Aviel pe eus eul levr santel bennak ?

Ya, diskleriomp a vouez uhel eo gwelloc'h an dud a relijion eget ar re all, ar re n'o deus tamm relijion. Lavarit d'in : « Ma ne greder ket e Doue, ma n'eus ket a zoujans evitan, ma ne greder ket ez eus eur vuhez all goude ar vuhez-man, eur Barner da c'houlenn kont diganeomp eus kement hor bezo graet, ma ne greder ket kement-se, perak ne c'helfer ket kemeret madou an nesa, lemel digantan e vuhez, rei da ioulou ar c'horf kement a c'houlennont ? »

Ma respontit : « Al lezenn a zifenn, an archerien a zo aze », e vezo gellet lavareñ d'eoc'h : « Eun dra gaer ! Me a ra fae war al lezenn, ha kaout a rin an tu d'ober va zroiou hep gouzout d'an archerien. »

N'eus harp ebet d'an onestiz, d'al lealded heb ar gredeñ e Doue, heb an doujans evit Doue.

Ne lavaran ket e ve laeron, muntreñien ar re holl n'o deus ket a relijion. Awechou e vez enno techou mat, plegou mat, desket d'ezo gant o c'herent pe o mistri pe an dud o deus darempredet. Met, pa gouez warno trubuilhou, taoliou kalet, setu i divarc'het. N'o deus ket, evit o harpa, o c'hennerza, ar fizians a gav ar c'hristen en e relijion. An den difeiz a jom gant e nerz e-unan, da lavaret eo gant e

zempladurez. Ar c'hristen a zo kennerzet gant Doue : « Fizians am eus e Doue, emezau. En Nenv em eus eun Tad a ouezo va digoll eus kement am bezo gouzanvet evitan ».

Klevet e vez hirio alies komzou evel ar re-man : « N'eus mui a goustians etouez an dud. Ne glasker nemet dastum madou n'eus forz penaos ha buana ma c'heller ».

Arabat beza souezet. Gwir e chom hag e chomo komzou ar Skritur sakr : « Penn kenta ar furnez eo doujans Doue ».

Lavaromp eta evelhen : « An holl gristenien n'int ket santel, met ar re a heuilh lezenn Jezus-Krist, a oar reiza warni o buhez, ar re-ze a zo ar re wella eus an dud. Ha seulvui e karont Jezus-Krist, seulvui e savont uhel er zantelez. Ar zent eo ar re vrasa etouez an dud. »



Ar Roue hag ar Falc'hon

KINNIGET, GANT DUDI, D'AR BARZ AB. SULIO.

BEZ e oa gwechall eur roue hag a oa laouen ouz an holl ha karet gant pep hini; eun dervez ez eas da redek ar c'haro, en eur c'hoat e lec'h ma veze kavet kals diouto; hep dale e tigouezas gand unan kaer meur-bed a oa o peuri el lec'h didrous-se; redek a eure war e lerc'h, met, kaer en devoa lakat herr, n'oa ket evit e dapa.

Pa oa skuiz a-walc'h o taoulammat, e stagas e gazeg, ouz eur wezenn, en disheol, e lakeas ar falc'hon a oa



gant an, war al leton hag e c'hourvezas e-unan, war an douar da ober eun ehan : « Sec'hed am eus, emezan, outan e-unan, red e vezo d'in eva eur banne ! » Endra ma lavare ar gomz-se, e welas beradou dour o koueza diouz barr uhela ar wezenn; kemeret a eure e hanaf da zastum an diverachou-se ha pa welas en devoa peadra da c'hlepia e staon e kemeras e hanaf da eva ar pezh a oa ennan; ar falc'hon, pignet a-benn neuze e beg ar wezenn, pa welas ar pezh m'edo e vestr o vont d'ober, a ziskennas diwar e skour, a-denn askell, a daolas an hanaf d'an douar o skuilh, evelse, ar pezh a oa ennan; ar roue o welet kement-se a yeas e kounnar rus; kregi a eure er falc'hon ha goude beza trouc'het d'ezan e benn her stl-pas d'an douar.

Mantret o welet pebez den drouk e oa ar roue, ar wezenn her skoas gand unan eus he barrou hag hen diskaras d'an douar, a-fardigleo; ar c'haro a dosteas neuze outan hag a skignas e zent; ar geot, sounn o-begou ganto,



a zelle outan gand euz; donjer o devoa an holl grouadurien outan, goude m'en devoa grêt eun hevelep torfed.

Ar roue, astennet war an douar, a zavas e benn d'an nec'h hag a welas eun naer krouget e beg ar wezenn; an diverachou a goueze en hanaf ne oant nemet diverachou lard an naer deuet da deuzi dindan tommder bañbou an heol; keuz en devoe neuze ar roue pa welas en devoa lazet ar falc'hon en devoa miret outan da eva ar c'hontamm milliget; gouela a eure dourek d'ar pezh en devoa grêt; kemeret a eure penn ar falc'hon hag hel lakat a eure war e vruched, gant doujans; mont a eure war e zaoulin hag e lavaras a vouez uhel: « Va Doue, kemer truez ouzin, rak lazet am eus unan hag a garen kals: euzus eo ar pezh am eus grêt; hen anzao a ran dirak an holl grouadurien ha va c'hastiza kalet a dleves! »

Ar wezenn a skuilhas daerou a levnez; ar bleuniou a dridas gand o dudi hag an Aotrou Doue o welet glac'har ar roue a lakeas e falc'hon da veza beo adarre; penn al labous a deuas da veza sounn war e c'houzoug hag ar roue her stardas, gant teneredigez, war boull e galon, hag a drugarekeas an Aotrou Doue da veza bet ar vadelez



da rei eur vuhez nevez d'al loenig paour en devoa grêt kement all a vad d'ezan.

Biskoaz, abaoe, n'eo bet ét ar roue da ober eur bale, hep ma vije e vignon-ker ouz e heul hag ar falc'hon hag ar roue a vez hano ganto a-wechou, diarbenn an den drouk a lazas an hini a gare pa oa e kounnar ruz.

*Savet e brezoneg diwar eur marvailh koz
baluchistan gant Ralph. S' V. ALLIN-
COLLINS (Drouiz Hal Wyn), Londrez,
Genver 1935.*

GERIOU DIES — Falc'hon : faucon ; — karo : cerf ;
— hanaf : coupe ; — kontamm : poison ; — bruched :
sein.

LEOR NEVEZ

Kanaouennou Bleun-Brug 1935

Ar skeudenn a gavit war golo Feiz ha Breiz ar miz-man a zo tennet diwar golo levr nevez Kanaouennou Bleun-Brug 1935, a gaver da bre-na adalek vremen e ti an Ao. Lemoine, 17, rue Pigalle, Paris-9^e, pe e ti an Ao. Ronan Caouissin, Pleyber-Christ. (Finistère).

Kanerien Breiz, stagit a-zevri da zeski kanaouennou nevez al leor-man, ma vezo eur mor a gan e Pleyben, d'an 3 a viz gwengolo a zeu.

KENAVO

Des-ket hon deus ka-ret Dou-e, Ha ka-ret ar Werc'hez.
*he*z Ni o lako hed hor buhe Da ren en hon tiez.
 Merc'hed yaou-anki rôk mont d'ar ger La-va-romp-ki-ma
 vo A vouez unan ka-romp se-der Ke-ma-vo Re-na-ra.

Merc'hed yaouank, rôk mont d'ar gêr,
 Lavaromp : Kenavo,
 A vouez unan, kanomp seder :
 Kenavo, Kenavo.

I

Desket hon deus karet Doue
 Ha karet ar Werc'hez...
 Ni o lako, hed hor buhe,
 Da ren en hon tiez.

II

Desket hon deus senti ouz tad
 Ha senti ouz hor mamm.
 Bepred dindan o daoulagad
 Ni 'vo fur ha dinamm.

III

Desket hon deus, n'eo ket garo,
 Labourat en hon ti...
 En ti betek pred ar maro
 Ni 'boanio a-zevri.

IV

Desket hon deus aoza prejou
 Hag aoza d'ar mare...
 Hon tud a lipo o mourrou
 Gant meuziou a zoare.

V

Desket hon deus deiz'her kempenn
 An holl arrebeuri...
 Pep labour, gant eur ganaouenn
 'Vo graet 'vel n'eur c'hoari.

VI

Bolz an oabl glas azioc'h hor penn,
 Peoc'h en hon tiegez.
 Nag e vo kaer hor planedenn,
 Leun bar a levez.

VII

Redek a raimp a galon vat,
 Daoust n'omp nemet merc'hed,
 Dioc'h ma vo red, d'ar park, d'ar prad
 Da zikour ar wazed.

VIII

An eil d'eben roomp sikour,
 Hag en deiz, hag en noz,
 Dre ar bedenn hag al labour
 Vit mont d'ar baradoz.

Aliou Yann Landevenneg d'ar Prins Lanig

LANIG (*oc'h en em deurel etre divrec'h Yann*).

Ah ! Tad, kenavo, mont a rankan d'ar gêr !

AMALGOD

Mab eur Judas !

YANN

Ro peoc'h, Amalgod, en han' Doue ; ar c'hrouadur-ze a zo dinam ; hennez eo ar Vro da zont ; ma vije eleiz eveldan eo !

LANIG (*oc'h en em denna goustad eus a dre divrec'h Yann*)

Kenavo, za Zad a fell d'ezan ez afen.

YANN

Ya ! pôtrig, gra diouz da dad ha lavar kenavezo d'az Preiz ; he c'haret a rez ?

LANIG

Oh ! ya, evel va mamm, ha ma vijen bet koso-c'hik, em bije roet va buhez eviti, ya, laouen !

YANN

Mat, taol warni neuze eur zell c'hoaz, an diveza, ha moul, war mab da lagad, dremm kaer ar vamm-ze, n'ez peus ket bet a amzer c'hoaz da anaout mat a-walc'h ; sell peger brao eo graet diouz hon eneo, pe gentoc'h peger brao eo graet hon eneo diouti ;

an dero-ze maget gant ar reier hag a deu, en hent-se, da veza ker kalet hag i ; ar brug-ze hag a oar en em staga ouz e zouar meinek hag a denn anezan e liou hag e c'houez vat ; al lann hag ar balan-ze hag a zispak o mantellou alaouret war zouar grouanek hor gwaremeier ; ar briou serz hag an tornaouchou uhel-ze hag a ra d'ar mor e kounnar chom a zav pa venn lemmel eus e aochou, an traou-ze holl a ro doare gaer, doare bennok, doare binvidik d'hor Breiz ha speg int holl ouz hor c'halon ; eun diframm eo eviti pa rank tec'het diouto evid atao. Hag an traou-ze holl, va mab, n'int nemet korf da Vro ; he ene eo an holl oberou dispar-ze graet gant hon tud koz hag a deu hano d'eomp anezo, dre an istor ; he ene eo ar brezoneg-ze, az peus desket war barlenn da vamm, hag e savas ennan ar varzed gwerziou ker kaer, war doniou ken dudiuz, ma teue an elez, d'ar red, war dreujou ar baradoz d'o selaou pa stagent d'o c'hana war o zelennoù alaouret.

Gant a ri, bugel bihan, dalc'h d'az brezoneg ha komz hen heb ehan gant da genvroiz daoust peger pell bennak e c'hellfes tec'het diouz da Vreiz.

Ra vezo atao da genta en da galon ha goude ma vefe red d'it paouez eur pennad bennak d'e gomz pa vezi e diavéz-bro !

LANIG

Bezit dinec'h, Tad, me a zalc'ho d'am brezoneg ha pa vo graet hano eus va Breiz dirazon, bep wech, e trido va c'halon ! Petra rin eviti pa deuin da veza bras ?

YANN

He sevel a-nevez, en he sav, kaeroc'h eget biskoaz ha rei lamm d'he holl enebourien.

LANIG

Ar pezh a c'hellin a rin eviti !

XXV^{et} Gouel ar Bleun-Brug

da 1, 2, 3 ha 4 a viz gwengolo a zeu e PLEYBEN.

TREDE DERVEZ AR GOUELIOU A VEZO RENET GAND AN AOTROU DUPARC, Eskob Kemper ha Leon



D'AR ZUL 1 A VIZ GWENGOLO :

Da 9 eur 30, e vezo digoret *Sal an Ti-kêr*, el lec'h ma tiskouezo « *AnDroellen* » (Atelier breton d'Art chrétien), an traou-iliz hag an traou breizek ha keltiek kaera a oufed gwelet (Exposition d'Art sacré).

Da 10 eur, Oferenn-bred ; prezegenn war ar Bleun-Brug : *Feiz ha Breiz*.

Da 14 eur, ouz son an trompilh, ar vombard hag ar biniou, e kreiz ar c'han hag ar meuleudiou, e vezo digemeret brudeta mab Pleyben a wiskas dilhad, an *Aotrou Mauris Tresiguidy hag e dud*, o tizrei eus Emgann an Tregont : kaera taolenn evit lakât ar bobl da anaout tud vat an amzer dremenet.

Da 14 eur hanter, gousperou war doniou bras ar pardonioù.

Raktal goude ar gousperou : E park ar Patronach, GOUEL BREZONEK : *Gourinadegou*, - *Korollou*, - *Kanaouennou*, gand Gourinerien, Korollerien ha Kanerien ar *Bleun-Brug*.

Sonerien *Kenvreuriez ar Viniouerien* a deuo eus a Baris da c'hoari gand ar biniou hag ar vombard.

Da 20 eur 30. — E Sal ar Patronach, BEILHADEG VREZONEK.

1) Eur ger war *Bleyben*, gand an Ao. GUILLY, noter.

2) *Emgann an Tregont*, pez-c'hoari savet gand an Ao. CORNOU.

3) *An Tren marc'had mat*, pez-c'hoari fentus, savet gand an Ao. PAGE.

D'AL LUN 2 A VIZ GWENGOLO :

Dervez *studiadennou* ha *prezegennou*.

Da 9 eur : Prezegenn gand an Ao. ARZUR DE DIEULEVEULT, war ar *Bleun-Brug* aboe m'eo bet savet betek vremen.

Eur ger gand an Ao. LÉGUISTIN ha gand an Ao. NESTOUR war ar *Bleun-Brug e Treger* ha war ar *Bleun-Brug e Bro-Wened*.

Da 10 eur hanter : Prezegenn gand an Ao. Raymond DELAPORTE war *Breuriez ar Brezoneg er Skolioù*.

Da 11 eur : Studiadenn c'hallek gand an Tad BELLOT, eur manac'h eus a urz Sant Beneat hag a zo brudet e pevar c'horn ar bed kristen dre an ilizou kaer en deus savet, war *La vérité dans l'art : tu ne mentiras point*.

Da 14 eur : Studiadenn c'hallek gand an Ao. CORVEN, eus a Gervaria, Bro-Wened, war ar *peziou-teatr brezonek*.

Da 15 eur : Studiadenn gand an Ao. H. CAOUISSIN, war *Emgleo ar Strolladoù c'hoarierien*.

Da 16 eur : An Ao. PERROT, Rener *Feiz ha Breiz*, a lavaro eur ger bennak war *Feiz ha Breiz, Feiz ha Breiz, kannad ar barrez ha Feiz ha Breiz ar Vugale*.

Da 20 eur 30 : *C'hoariadeg* e sal ar Patronach.

D'AN 3 A VIZ GWENGOLO :

Da 8 eur 30 : *Oferenn ar Bleun-Brug*. Epad an oferenn-ze, ar strolladoù kanerien a gano kantikou brezonek hag an Aotrou DUPARC, Eskob Kemper, a raio eur brezegenn.

Goude an oferenn : *Kenstrivadegou bloaveziek ar Bleun-Brug*, e sal ar Patronach : Kan, displegadeg, lennadeg ha prezegerez.

Da 12 eur : *Lein en « Hôtel des Voyageurs »*.

Da 14 eur : *C'hoariadeg vras* e sal ar Patronach : Kanaouennou gand ar Strolladou o devezo keme-
ret perz e kenstrivadeg ar c'han.

— Diskleriet e vezo evid ar wech kenta, eur pe-
z-c'hoari nevez eus ar re gaera savent gand an Ao.
CORVEN, eus a Gervaria : *Eun Tad en devoa daou
vab.*

D'AR MERC'HER 4 A VIZ GWENGOLO :

E LANDEVENNEC. — Er bloaz 935, breman ez
eus 1000 vloaz, Yann, unan eus abaded brudeta Lan-
devennec, hag en devoa ranket tec'het a-raok an Nor-
maned, gant relegou sant Gwennole, a c'hellas dis-
trei d'e vanati koz hag a stagas raktal da unani e
genvroiz ha da stourm ouz enebourien Breiz. Evit
lida, da vat, milvet bloaz an distro laouen-se, e vezo
kanet, gand aotre an Aotrou 'n Eskob, da 10 eur
hanter, etre mogerioù hanter gouezet iliz koz an
Abati, *oferenn-bred* sant Gwennole, evit hor Breiz-ni
hag ar re holl o deus roet o buhez evit he silvidigez.

Araok an oferenn, e vezo kanet ar bedenn-man,
evid ar Vretoned aet da anaon : *Languentibus in
purgatorio*, savet gand eur manac'h eus a Lande-
vennec.

Da 12 eur : *Lein en « Hôtel du Beau-Rivage ».*

Da 14 eur : *Gouel brezonek* eus ar re gaera; c'hoari-
riet e vezo dreist-holl, an eil arvest eus ar pezh kaer
meurbet : *Yann Landevenneg : SAV.*

Da 17 eur : Distro da Bleyben, dre Vene-Hom, Le-
cronan ha Kastellin.

Er miz a zeu e kavoc'h aman prizioù tiez hag ostale-
rioù Pleyben e c'helloc'h ober enno ho fiskenn, epad si-
zun vras ar Bleun-Brug.

Pleybeniz a ray eun digemer eus ar re laouenna d'ar
Vretoned vat a deuo d'en em unani ganto epad gouelioù
kaer ar Bleun-Brug da gana gloar da Vreiz, hor Bro.

KANAOUENNOU XXVth GOUEL AR BLEUN-BRUG

Roll ar sonioù a gaver el leor-se

- A) **EVIT KANERIEÑ A-UNANOU (Solistes)**
Soprano : *AR GOULENN-EURED (Ton-heulia :
MAYET).*
Contralto : *SON AR C'HRAMPOUEZ GWINIZ
(Komzou : L. AR MOAL. — Ton-heulia : H.
H. GUILLERMIT).*
Tenor : *AR VLEUNVENN LILI (Dastumet gand
an Ao. hag an Itr. AR GO. — Ton-heulia :
H. GUILLERMIT).*
Baryton : *INTANVEZ GOEZEG (Dastumet gand
an Ao. hag an Itr. AR GO. — Ton-heulia :
J.-L. MAYET).*
Basse : *FANCHIG AR MIGNON (Ton-heulia :
J.-L. MAYET).*
- B) **EVIT KANERIEÑ A-STROLLADOU (Chœurs)**
Diou vouez merc'hed : *SON AR YAR (Divar LU-
ZEL).*
Teir mouez merc'hed : *AR VATEZ VIHAN (Kom-
zou : Filomena CADORET. — Ton-heulia :
Paul LE FLEM).*
Teir mouez dishenvel : *AR PAOURKEZ LANIG
(Ton-heulia : Paul LE FLEM).*
Teir mouez dishenvel : *YOUEN (Ton-heulia :
G. ARNOUX).*
Peder mouez dishenvel : *BRO GOZ MA ZADOU
(Ton-heulia : J.-L. MAYET).*
- Gouennit Kanaouennou XXVth Gouel ar Bleun-
Brug ouz an Ao. Ronan CAOUISSIN, Pleiber-Christ
(Finistère). — Chèques Postaux : V^{ns} Caouissin, 22.092
Rennes.
- 20 real hepken eo al levr nevez ha 22 real pa ran-
ker e gas d'ar prener dre ar post.

Kenstrivadegou ar Bleun-Brug

I. — KENSTRIVADEG AR SKRIVA (Concours de narration)

Etre bugale ar skoliou a lenn « Feiz ha Breiz Ar Vugale »
RESPONTIT D'AR GOULENNOU-MAN :

1. — *Ha karet a rit-hu Breiz, ho Pro ? Perak ?*
2. — *Ha karit a rit-hu ar brezoneg, ho yez ? Perak ?*
3. — *Petra a reoc'h diwezatoc'h evit miret ar brezoneg soum en dro d'eoc'h ?*

Kas ar responchou a-benn hanter-eost da ziwezata da :
M. le chanoine GRILL, inspecteur de l'enseignement libre, impasse de l'Odet, Quimper.

II. — KENSTRIVADEG AL LENN (Concours de lecture)

Etre bugale ar skoliou; barnet e vezint war eur penad pe bennad a lennint e « Feiz ha Breiz ar Vugale ».

III. — KENSTRIVADEG AN DISPLEGA (Concours de déclamation).

Ar re a gemero perz er genstrivadeg-man a vezo rannet e daou rummad : ar vugale, betek 15 vloaz, hag ar re yaouank etre 15 ha 25 bloaz : ar pezh o devezo da zisplega eo : ALIOU YANN LANDEVENNEC D'AR PRINS LANIG : N'O DEVEZO DA ZISPLEGA NEMED AR PEZ A ZO MOULET E LIZERENNOU ITALEK. (En italiques).

IV. — KENSTRIVADEG AR PREZEGEREZ (Concours d'éloquence).

Ar re a gemero perz er genstrivadeg-man a vezo rannet e daou rummad :

- a) Rummad ar re yaouank etre 15 ha 25 bloaz hag a zo chomet er gêr eus ar skol.
- b) Rummad ar re yaouank etre 15 ha 25 bloaz hag a zo oc'h heul ar skoliou bras.

Ar pezh o devezo da ober eo meuleudi an abad brudet Yan Landevennec.

Evit ma vezo êsoc'h d'ar genstriverien ober o frezegenn e voulimp, e « Feiz ha Breiz » ar miz a zeu, an diverra eus buhez skouerius an abad kalonek se a dlefe beza anavezet e istor gand an holl Vretoned.



Divinadennou miz mezeven



1. — **W . r . a . m . z . . . z . s . . e . a . h . . i . i .**
H . . e . k . . . z . e o . . d . . . b . i

(Degaset gant Helena Cuzon, Briece).

2. — Ripa-rapa warlerc'h kripa-krapa, panefe da chilpa-chalpa oa debret kripa-krapa gant ripa-rapa ?


3. — Me 'm eus eur moutig brao,
Ne gar nag an noz nag ar glao,
Kement a sked a zo d'ezan,
Ma n'hellan ket sellet outan.

PIOU EO ?

(An diou zivinadenn-man a zo bet degaset d'eomp gant Y. Riou, Plogonnec).

4. — † — Gwelet e vezan er baradoz.
† † † — Eun taol teod.
† † † † † — Me em eus daou benn henvel.
† † † † † † — Gouezet em eus ar respont.
† † † † † — Boued-chatal.
† † † — Eun taol teod.
† — Eus va fenn oun henvel.
5. — Pegement a bouez a c'hell ar mor dougen ?
(Degaset gant J. An Ozac'h, Scrignac).

Kuzulioù ar geginerez




AR piz a zo mat e pep doare : o foazat hag o dibri a wener e c'heller ive o dibri o-unan : Grit eun tamm lipig rouz gant lard-teuz; lakit eur guchenn ognon, frailhet munud, en ho lipig; pa vezint rouzet brao, d'o zro, e lakeoc'h ganto pebr hag holen, hag e taoloc'h ho piz da boazat goustadik war an tan; arabad e vefe re a dan; lakit eun nebeudig dour, beb an amzer. Poazet a c'heller, en hevelep doare, fâ-munud glas.

EUR SEKRED ALL

Klaskit pevar benn-saladenn ha lakit o c'halonenn nemetken en eur gastolorenn, war an tan gand eun tammig holen hag eun tamm amann; o lezit da boazat epad eun eur hanter, goloet ar gastolorenn ganeoc'h, hag araok o servicha war an daol, lakit tri pe bevar tamm sukr ebarz. En eur plad doun, e lec'h m'ho peus sonj da lakat ho piz da vont war an daol, lakit tri pe bevar melen-vi hag o c'hemmeski gand eun tamm amann; hag a-nebeudou, en eur drei atao gand eul loa, taolit ho piz er plad; met kemerit-i gand al loa-zil evit ma c'helloc'h lezel er gasotolorenn an dour a vezo bet ouz o foazat.

LIZIG.

Kuzulioù ar Medisin



DRE riou, alies, e paker flipajou, pe c'hoaz pa gemer re a vec'h; pe en eur blega ha displega e gaou. Ehana ranker; chom heb loc'h zoken, ha lakat palastrou tomm. Frota 'c'heller ive gand eol tourmantin, pe gant « teintur d'iod »; lakat gloan tomm war ar flipad, ha gwer.

C'hoaz, e c'heller ober : Frota gand odivi kanfret ha gelei gand « ouat »; eva tizan da c'houezi, evel thé, tizan diwar skao, diwar bleun-skao, pe diwar deliou beuz.

Lakat penzeg gramm butun da fumi, da drempa, eur pennad brao, ebarz kant gramm odivi kanfret; souba palastrou ennan, ha lakat pemp pe c'houec'h gwech bemdez e lec'h ma 'z eus poan. Setu eul louzou all : eol da zibri, ugent gramm, eol tourmantin ugent gramm, « alcali » ugent gramm, holen gwenn, eul loaïadig, hag eur meutad pouitr kanfr; kenneski an holl draou-ze, ha souba enno eun tamm flanell da frota diou pe deir gwech bemdez.

Frota 'c'heller c'hoaz, epad diou vunutenn al lec'h gouridik gand eul loa-staen.

En niverenn genta, e livirin hano eus ar pezh a hanver e galleg « loupennou », hag a zo traou diaes a-walc'h da barea.

Paol AR RIOUALLON.

KELEIER AR MIZ

AN Ao. 'N ARC'HEKOB DE GUÉBRIANT

An Ao. de Guébriant, arc'heskob Marcianopolis, rener ar visionerien diavêz-bro, a zo bet sebeliet e gorf, e iliz-veur Kastell-Paol, dirak 4 eskob, 40 chaloni, 200 beleg hag eur mor tud d'an 13 a viz mae diveza.

An Aotrou Duparc, a reas e brezegenn-ganv; 1361 misioner, da lavaret eo 602 veleg, 284 lean ha 475 leanez en deus roet eskopti Kemper ha Leon d'an Iliz e 100 vloaz; skouer vat an denchentil ma oa an Aotrou de Guébriant a zo bet heuliet.

Ra vezo e vez evel eur mell a skoulmo adarre, pa blijo-gant Doue, beziou eskibien koz Kastell-Paol ouz beziou e- eskibien nevez.

MARO EUR BREIZAD DIVROET

An A. Georges Arnoux a zigas d'eomp kelou glac'harus maro an Ao. J.-M. Kermarec, ginidik eus a Blouzéniel, maro e Paris, e kreiz e vrud; an A. Arnoux a ro d'eomp da anaout e karnere hor c'henvroad plijadur c'hoaz, en e amzeriou diweza, o lenn hor « Feiz ha Breiz ».

E erbedi a reomp ouz hol lennerien.


PARDON COURBEVOIE

Trede pardon breizek Courbevoie a vezo grêt gant Bretoned Gwalarn Paris, e « Stade Andre Grisoni », e Courbevoie, d'ar 16 a vezeven 1935.

Ar gouel-se a zo grêt evit dastum eur gwenneg bennak dasikour kas bugale baour Bretoned Paris da di o zud koz, e Breiz-Izel, epad an hanv.

Evit kaout muioc'h a sklerijenn, skriva da : M. Aristide Gautier, Commissaire général du pardon, 17 bis, rue Etienne-Marcel, à la Garenne (Seine).


Eun darvoud war ar flourenn



Itron Gavr. — Aet oc'h Lanig ?

Lanig. — Ya, itron, pegvir eo brao an amzer ez aimp da ziskuiza war ar flourenn.

Itron Gavr. — Tra ! tra ! Dre va bouchig, eur spontailh eo hennez a wei-n du-hont !



— Jibidi ! Jibida ! a ! Yo, lamm d'ezan !

— Bravo, toros !...

(Diwar *Cymru'r Plant*.)

PER AR C'HOLIN !...



LEORIOU NEVEZ

OBEROU FANCH ABGRALL,

ALC'HOUEDER ARRE 1907-1930, moulet goude e varo

Tome I. — Poésies : Luc'hed ha moged.

Tome II. — Proses : Et moi aussi, j'ai eu vingt ans.

EUN den yaouank, speredek kaer, ginidik eus a Vod-meur ha dihenthet gand ar gelennadurez c'hall ha dizoue en devoa bet e Montroulez, diwar hent e Vreiz ha diwar hent e Feiz, setu petra eo bet, Fanch Abgrall, e penn kenta e amzer; e youl, d'e 18 vloaz, oa beza eur barz brudet gand e skridoù gallek (1) hag e feiz a dlee ivez beza et da hesk rak abeg a gav en e vamm goz « a zelaou ar pez a lavar d'ezi he ferson, an Eskob, ar Pab, a gred e Satan hag a glask e lakât da ober e bask ». (2)

Eur gwall glenved a dapas, p'edo oc'h echui e skolach hag a dlee e ziskar er bez pemp bloaz goude, a roas tro d'ezan da ober anaoudegez gant tud vadelezes hel lakeas da anaout ha da garet hor Breiz; staga e eure neuze da skriva e yez e dud koz gwerzioù hag a ziskouez e oa danvez eur barz ennan, Selaouit hen o hoñal d'e genvroiz, diwar gern Menez Mikêl :

*Hor Bro goz a zo dihunet, tôleit he deus he mantell,
Holl, war zao, evit he difenn deus an enebour marvel.*

*Krog an tan en hor c'halonou,
War zav, paotred ha merc'hed !
Koz ha yaouank, peoc'h d'hor c'hlemmou,
An naskou a zo devet !
An tan flamm ne ve ket lazet,
Tôleit traou kreiz an tantad,*

(1) Cf. : « Luc'hed ha moged », p. 6.

(2) Cf. : « Et moi aussi, j'ai eu vingt ans », p. 33. El leor-man ez eus pajennoù ha n'int ket da veza laket dindan daoulagad an holl.

*Pe ne vimp morse deubet.
Krog an tan ! War zav, Breizad (1)*

Gwella-ze, m'en deus gellet ivez e glenved e lakat da welet ar vad a ra ar c'hroaziou a daol Doue war hon diouskoaz; ya! gwella-ze m'en deus gellet ar c'hlenved e lakat da bedi, evel e vamm goz, rak an Aotrou Doue a vezo deuet neuze war e zikour evel m'her goulenne, e komzou ker c'houek, en e leor :

« Va Doue, deuit d'am savetei ! ha c'houi, Aotrou
« benniget sant Mikêl, hag a zo karget da ziouall ar
« vro tro-dro, diwar ho menez koz, c'houi, sant Mi-
« kêl, patron ar vesaerien hag ar bilhaouerien, c'houi
« hag a oar para ha frealzi, deuit d'am sikour ;
« evel pardonerien an amzer goz e pignin diarc'hen
« betek ho chapel ; bezit mat ouzin ha lakit an Ao-
« trou Doue da ziskouez e drugarez divent em
« c'henver ! » (2).

Fizians hon eus e vezo deuet an Aotrou sant Mikêl, pouezer an eneo, war zikour ar barz yaouank a oa oc'h uza e traon e venez hag en devezo e laket da welet tamm ha tamm « e poullou-lagad digig an Ankou daoulagad doueel, doueel, doueel, an Hini laket e kroaz » evidomp hag a oa e skeudenn venniget a-uz e vele a boan.

Doue r'hen pardono !
Y.-V. PERROT.

Ai leoriou-ze a zo e gwerz e ti an Aotrou Bothorel, apotiker e Huelgoat : 10 lur ar pez.

Jean Choleau. — DE ROSCANVEL A LANDAVRAN,
Illustrations de Broutelle, Louis Le Guennec, Raoul David, Le Doare, Jac Pohier, Jorj Robin et de l'auteur.
Editions de Unvaniez Arvor, Vitry.

(1) Cf. : « Luc'hed ha maged », p. 14.

(2) Cf. : « Et moi aussi, j'ai eu vingt ans ! » p. 62.

Ma fell d'eoc'h deski ar brezoneg
heuilhit skoliou dre lizer « OBER »
Skriva d'an d^el M GOURLAOUEN
30, Rue de la Corderie, DOUARNENEZ

Ha c'houi garfe ober plijadur d'eur bugel ?



....Prenit d'ezan, hepdale, eul
leorig brezonek eus ar re goanta :
POUFER HA KROK, ouspenn 60
skeudenn ebarz....

N'eo nemet 8 real ar pez (dre ar
post : 2.25).

Her goulennit e ti Ronan Caouis-
sin, Pleiber-Christ (Finistère).

C./C. Mme V^{ve} Caouissin, 22.092
Rennes

BRETONED, evit gwin Champagn

Gwin Champagn, W. SANDERS, Reims

eo gwella ha marc'hamata gwin Champagn a oufec'h
kaout da brena er vro-man.

Evit kloza al leinou bras hag evit krenfaat ar re glanv,
n'eus gwin ebet gwelloc'h egetan !

E briziou a zo diskennet kals izelloc'h c'hoaz eget ne
oant er bloaz 1934.

Goulennit ar prizioù ouz an

Ao. RONAN CAOUISSIN,

Représentant à PLEIBER-CHRIST,

Klenved ar c'henou hag an dent

L. LAPIQUONNE SUCESSEUR DE
L. JEZÉQUEL

Tenner dent
Loret gant skol-vedesinerez Paris

A denn an dent hep poan hag a laka dent nevez, war aour
ha war gaoutchouk, hervez ar skoueriou diveza
Gwarantisa a ra e labour

RESEO A RA :

Bep Lun, e **LESNEVEN**, Hôtel Le Roux, ha bep Sadorn, e
BRASPARTS hag er **FAOU**. — Ar c'habinet a gonsultationou a zo
digor e Brest, 4, passage Saint Martin, aboue eur beteg kreisteiz, ha da
2 eur beteg 6 eur. Téléphone 0-16



Yec'hed ar Vugale

Ar "Sirop FERET"

a-eneb an Doken

Graet gant louzaouennou hag a gaver er mor, ar sirop-man
a ro nerz hag a yac'ha ar gwad. Ouspenn m'en deus eur vlaz
eus ar re wella, louzou all ebet ne ro kement a nerz d'ar vugale
hag hen.


« Ramplasi a c'hell ervat an emulsionou, an eol-moru, ar si-
rop Portal, ar sirop Raifort iodé, hag all... » Ar vertuz en
deus da yac'haat ar gwad, ouspenn ar vertuz da zigas an nerz
d'an izili, a zo penn-abeg m'z n'her roer morse en aner d'ar vu-
gale taget gant an doken, an trousklennou leaz, ar werbl, an
doureier fall, droug-ar-roue, hag ar zempladurez a deu war-
lerc'h ar ruzel hag an dreo, etc.

En vente dans toutes les pharmacies.

Dépôt principal : **GRANDE PHARMACIE DU PROGRES**,
2, rue de Paris (au-dessus de l'Octroi), BREST.



le sac de 250 gr.
5.85
avec un Bon-Prime



Ti koz L'OLLIEROU

L'HOSTIS & JORDE, Successeurs

18, 27, rue Louis-Pasteur, 18, 27. — BREST

... Pa ho pezo eun dra bennak da brena, dalc'hit sonj eo en
HON TI e kavoc'h ato ar muia da joaz hag an dessiniou nevesa
e mouchoerou ha tavancherou brodet.

SEIZ, MEZER, HA DANVEZ A BEP SEURT

Dioc'h ar galite an ti-man a werz gwelloc'h-marc'had
eget neus forz pehini all.

Eun eskompt a UGENT REAL DRE GANT a vez roët
e marc'hadourez, ha DEK DRE GANT d'ar familhou ni-
verus diwar diskouez o c'hartenn.

--- "Ne c'hellan ket lenn ken !...



oent eo d'in

mont da di

POITEL

Ar gwella

marc'hadour

lunedou a zo e

MONTROULEZ!..

Eno

e kaver :

LUNEDOU

a bep seurt

evit an holl !..

Hag eur Benveg eus ar re wella.

Evit ar re vouzar : Ar Sonotonor.

PHOTOS -- Appareils, Plaques, Pellicules (*de toutes marques*)

Ti POITEL :: Ti glas :: Ti a fizians

War Blasen THIERS

MONTROULEZ

◆ Eno e vezo graet d'eoc'h ar gwella digemer ◆

Ar Mérour : H. CAOUISSIN, Scignac.
MOULADURIOU AN ARVOR. — GWENGAMP.